

Peskig arc'hant

Peskig arc'hant, peskig glas,
O neuñ 'barzh ar mor bras,
Lavar din 'pelec'h out bet
Ha petra 'peus gwelet ?

Me am eus graet tro ar bed
'N ur c'hoari gant ar stered
A gustum sellet en dour
Evel en ur melezour.

Foñs ar mor a zo livet
Gant kaerañ livioù krouet.
Ar bezhin eo hor bleunioù
Ar c'hregin hor bravigoù.


Peskig, me 'yelo ganez
Da dañva da levenez.
Ebatall mintin ha noz
'Dle bezañ ur baradoz.

Faziañ a rez, bugel,
Du-mañ ivez ez eus brezel.
Ar re vihan gant ar re vras
Zo bet lonket a-viskoazh.

Urzh labour :

1.  Lenn ha  selaou ar rimadell.

➔ <https://www.reseau-canope.fr/tes/enrolladennou.php?diell=397>

2.  Lenn/adwelet ar c'heriaoueg (pajenn 3).

3. Deskiñ ar rimadell tamm ha tamm.



4. Kinklañ  ar rimadell gant un dresadenn .

Geriaoueg



Neuñ




Ar bed




Ar stered



Ar melezour



Ar bezhin



Ar c'hregin



Ar bravigoù



Levenez



Ebatal



Ar brezel